

KANIRI BREIZ-IZEL

Jean-Pierre-Marie Le Scour (Barz Itron Varia Rumengol) est né à Rumengol en 1815. Il mourut à Morlaix (où il laisse de nombreux descendants) en 1870.

Ses œuvres principales sont : « Telenn Rumengol » et « Telenn Gwengamp ».

Profondément religieux, il honorait particulièrement « Notre-Dame-de-Rumengol ». Le nom de la bonne Vierge qu'il affectionnait lui servit de pseudonyme bardique.

La poésie de « Plac'hik » parfois appelée « Kaourantinnik » est d'une touche impeccable et d'une douceur angélique.

Rien ne saurait mieux plaire à la pureté de l'âme celle, idéaliste par excellence, superstitieuse au possible, dont le cœur s'élève au-dessus des contingences terrestres, des injustices et de l'immoralité du monde actuel.

La douce Kaourantinnik donne son cœur à la Vierge de Rumengol et ses malédictions vont aux Anglais, les ennemis séculaires du Continent. Cette douce mélodie, chantée dans tous les milieux, croyants ou incroyants a toujours remué les cœurs.

L'air en est suffisamment répandu pour que vous missiez tous la chanter dans vos veillées.

T. P.

Plac'hik Eussa

'NE - NEZ EU - SSA ZO EUR PLA -
C'HIK Ia - OU - ANK FUR KOANT VEL
EUN E - LIK IAOU - ANK FUR KOANT
VEL EUNN E - LIK VEL EUNN E -
LIK VEL EUNN E - LIK

War don : En deiz kenta euz a viz du
Tisken ar Saozon en dour du

Enn enez Eussa, eur plac'hik
Iaouank, fur, koant'vel eunn elik (bis)

Iaouank, fur, koant'vel eunn elik ;
He hano voa Kaourintinik.

Siouaz ! ne oa ket pemzek vloaz,
Ar pac'h a zouge he c'hroaz,

E-c'harz ar mor, war eur garrek,
Kaourintinik wele dourek.

A greiz he c'halon, he fedenn
A zavas d'ann env evel-hen :

« O stourm oc'h listri ar Zaozon,
« Va zad zo beuzet er mor don.

« Kalon va mamm baour a rannaz,
« Gant ar c'helou-ze, pa glevas.

« Me n'en euz den, allaz ! brema ;
« Petra rinn-me war ar bed-ma ?

« Me n'em euz mui war ann douar
« Na tad, na mamm, na kar, na par ;

« Na tad, na mamm, na kar, na par ;
« Va bluez vo kaon ha glac'har.

« -Nann ! Ar daour enn env deuz
[eunn tad,
« Hag e Remengol eur vamm vad !

« Va mamm d'in e deuz lavarêf,
« Pedi ar Werc'hez vinniget ;

« Pedi Gwerc'hez vad Remengol,
« Ha ne d-ajenn biken da goll.

« Astennit'ta ho torn santel,
« Gwerc'hez, brema war ho puge !

« Me, minorez paour dilezet,
« War va zreid noaz iel d'ho kwelet, let,

« War va zreid noaz'z inn d'ho kwe-
let, let,
« D'ho ti, d'hoc'h iliz holl Remed.

« Seiz tro a rinn d'ann aoter vraz,
« War vo daoulin, d'ar pardon braz ;

« Ha seiz tro d'hoc'h iliz santel,
« Gwerc'hez, patronez Breiz-Izel.

« Ann dud kez. Itron Varia,
« Da roi d'hoc'h n'ho deveuz netra,
« Na gouriz koar, na goulaouenn
« Netra, netra !... 'met ho fedenn,

« Evel-t-ho, slouaz ! me zo paour,
« N'am euz 'met ma bleo melen-aour.

« Me a roi d'hoc'h eur gurunenn,
« A vo gret gant ma bleo melen ;

« Gret gant bleuniou keant ar parkou,
« Ha glizennet gant ma daelou.

« Eat eo enn hent Kaourintinik,
« Enn he dorn eur wialennik ;

« Enn he c'halon, feiz, karantez
« Ha nerz deut digant ar Werc'hez.

« Treuzet ar mor, ma war ann hent
« A gas d'ann env, da gaout ar zent.

« Tostat a ra, n'ema mui pell,
« Gwelet e deuz ann tour santel.

« P'e deuz gwelet, eo daoulinet,
« Hag he c'halonik deuz tridet.

« E Remengol, p'en em gavaz
« Da dreid ar Werc'hez e pokaz

« O lavaret : « Va mamm zantel,
« Ama, me a garfe mervel !

« Me n'am euz den, paour kez pla-
« Kasit gan-e-hoc'h Kaourintinik !
[c'nik

« Ama, va c'horf a repozo,
« Gan-e-hoc'h va ene a ielo !

« Hag ar Werc'hez, gant karantez,
« A lavaraz d'ar plac'hik kez :

« War ann douar zo tud diroll,
« Va bugel, mar d-afez da goll !

« Da ene ha da galon baour
« Zo brema dur evel ann aour.

« Kaourintinik, d'euz d'ann envou
« Da veuli Jezuz, hon Aotrou.

« Kaourintinik, enne ur vervel,
« A lavare a vouez huel :

« D'ar Werc'hez me ro va c'halon,
« Ha Va malloz gant ar Zaozon ! »

J.-P.-M. LESCOUR

La longueur du texte nous oblige
à reporter notre « correspondance »
à la semaine prochaine.

TONTON PHILE